

# Chansonn Marie, Ar Plac'h Friant

382

## 1<sup>er</sup> COUPLET

Didostet tadou ha mamou  
Ha c'houi ive tud youank  
Da zilaoui me o pet  
Marie ar plac'h friant.

## 2<sup>e</sup> COUPLET

Pehini deus c'hoant d'a explica  
Pen da ben e bue  
Heb lavaret netra ken  
Nemet ar verione.

## 3<sup>e</sup> COUPLET

Mi oa c'hoas, em c'havel  
Va mamm a lavare  
Vijen papred o crial  
E varlec'h ar hoaset.

## 4<sup>e</sup> COUPLET

Mes pa oan deut da sonjal  
E oa eur verionez  
Rac an natur an den  
Na jench quet alies.

## 9<sup>e</sup> COUPLET

Ma zad a ma mamm  
Laras din eun devez  
Ni neus sonjet, ho merc'h  
C'houi iela da Seurès.

## 10<sup>e</sup> COUPLET

Kement se reas diman  
Tourmant a poant speret  
Me, pehini a gare  
Kement an oll hoaset.

## 11<sup>e</sup> COUPLET

Goulsoudé an amser-se  
Ne moa ket cals a kiant  
Ne hanevesen quet ar bet  
Evel ma ran breman.

## 12<sup>e</sup> COUPLET

Mes natur ar plac'h friant  
E oa enon deja  
Ne ket ar c'houanchou  
E oan o clask beva.

## 17<sup>e</sup> COUPLET

Ma zad, ma mumm laras din  
Gant an air e coler  
Ma ne iaoc'h quet d'a seurès  
C'houi labourou er guer.

## 18<sup>e</sup> COUPLET

Digan cals a drubuil  
C'houi labourou bemde  
Gouzout a ri plabic paour  
Ne ma quet bras ho tanve.

## 19<sup>e</sup> COUPLET

En despet da guemense  
Me veso ato contant  
Ma diou vrech a zo mad  
Evit gonit arc'hant.

## 20<sup>e</sup> COUPLET

Ma na loubourin quet douar  
Me vo quemenez  
Ag a blig calz guelloch diman  
Eguit beza seurès.

## 5° COUPLET

Va oll guerent dimañ  
Oa tud a sevotion  
Ha daou c'hoant deñ zeski  
Ar guir religion.

## 6° COUPLET

Pe oan an oad dañs bloas  
Me e oa bet casset  
Evit besa desket mad  
E ti ar seureset.

## 7° COUPLET

Pa oan deuet an oad  
D'ober ma fash kenta  
C'houian neubeut katekis  
Mes lenn mad a scriva.

## 8° COUPLET

Deskete m'oa ive  
Cauzeal ar gallec  
Vit parlan eus ar belec  
Ne oan quet embarrasset.

## 13° COUPLET

Ne man ket o hoapa  
Tud ar religion  
Mes caracter ar seures  
Ne m'a ket heñ c'halon.

## 14° COUPLET

O vont bemde d'a offeren  
Ha d'a sacramenti  
Ar zonch m'a quet em speret  
Ne c'halonn quet pedi.

## 15° COUPLET

Rac pa teuont d'a sonjal  
Peguemen a boaniou  
Na deus quet eur plac'h friant  
D'a souffre ar c'houanchou.

## 16° COUPLET

O pedi, o pedi  
Atao ag eh bian  
Eun drase ne de quet affer  
Marie ar plac'h friant.

## 21° COUPLET

Pe vant an oad da seitec vloas  
E commansas an dud  
Digant o seod miliguet  
Da rei dimañ goal vrud.

## 22° COUPLET

Hounes zo eur plac'h pen skaon  
A lavaras unan  
Ag e ia varlech an oll  
Eun tamic mañ friant.

## 23° COUPLET

Guelet reont anesé  
Ebars peb assamblé  
E renk be ato an tente  
Pé planch an hostaliri.

## 24° COUPLET

Assembles gant a oll dud  
A re vras a bian  
Coulz paour a penvidic  
Tispign e samm arc'hant.

## 25° COUPLET

Pa ve deuit an heur  
Evit distrée dar guer  
Marie ar plac'h frant  
A gav ber e amser.

## 26° COUPLET

Gortoed, eme Marie  
An amser a zo brao  
Ben an heur pe diou aman  
Ne vo met noz ato.

## 27° COUPLET

Hounes a zo, henvel  
Eus a lapous kaouen  
Enez na gar quet bala  
Queit ma ve sclerigen.

## 28° COUPLET

Gant Marie ar plac'h friant  
A c'houarvez memes tra  
Eo red deñ gortos an nos  
Vit mont da lapoussa.

## 29° COUPLET

Setu va mamm neuze  
Ho clevet kement-se  
E teuas aon deski  
A reas kenteliou dime.

## 30° COUPLET

Dioualit eta ma merc'h  
Demeus ar bed tromplus  
Evel pa valit var ar c'hler  
Ma meurbed dangerus.

## 35° COUPLET

Dillad e vo roed d'eorc'h  
Demeus ar re gaera  
C'houi labourou guelloc'h  
Vit galloud ho faïa.

## 36° COUPLET

An devez dreis a real  
Me eun nim viskas caer  
Da vont da denna ma fortrait  
Betec caer a Quimper.

## 37° COUPLET

Gant va c'hamaradeset  
Eb bea calz genet  
Ar mimi bars em c'herien  
Setu me partiet.

## 38° COUPLET

Ben oa deut va portrejou  
Me oa meurbet contant  
Rac cals caeroch et oan c'hoas  
Ve na sonje diman.

## 39° COUPLET

Dride reas va c'halon  
Pa glevan lavaret  
Houman e ar brava plac'h  
E meus biskpas gulet.

## 40° COUPLET

Modest et vigen ato  
Gant va guiskamanchou  
Guisquet kaer vit gallout monu  
Dan oll assambleou.

## 45° COUPLET

Re vras oa et vragou  
A re ver e chupen  
Evit gallout koseal  
Gant Marie bleo melen.

## 46° COUPLET

Dre ma eont pell d'eus ar guer  
An traon ya var falle  
Ne gavant min respet d'eorch  
Nemet eun drandoué.

## 47° COUPLET

Drole gavant e barlant  
Ag e viskamanchou  
Teïr ruban eus e dog  
Babous eus e hinou.

## 48° COUPLET

Bep sâdorn ve e Quimper  
Hô versa allouer  
Na vank de nemet eur plac'h  
Evit cacat ber e amser.

## 49° COUPLET

Be neus eun ty, eur jardinn  
Ag ive cals arhant  
Jamais ve guellet ludic  
Lavaret dign e unan.

## 50° COUPLET

Setu va mamm neuze  
Clevet, ne vant quet contant  
Demet gantan va merc'hic  
Henes deus calz arhant.

Setu va mamm neuse  
Ho clevet kement-se  
E teuas aon deski  
A reas kenteliou dime.

30° COUPLET

Dioualit eta ma merc'h  
Demeus ar bed tromplus  
Evel pa valit var ar c'hler  
Ma meurbed dangerus.

31° COUPLET

An hini jom ploamm he sao  
Henès c'hello kerset  
Mes pa jonsorc'h an neubeutorc'h  
C'houi veso discaret.

32° COUPLET

Excusit ta va mamm  
Me gred c'houi zo eu tort  
Rac ho merc'h zo capabl  
Da zioual e henor.

33° COUPLET

Ne ma quet red d'eorch gredan  
Besa embarasset  
An dud yaouanc zo breman  
A zo civiliset.

34° COUPLET

Ia gouzout a ran va merc'h  
Penos out eur plac'h fin  
Na gredan quet lar meus lec'h  
Da guemerout chagrin.

Dride reas va c'halon  
Pa glevan lavaret  
Houman e ar brava plac'h  
E meus biskoas gulet.

40° COUPLET

Modest et vigen ato  
Gant va guiskamanchou  
Guisquet kaer vit gallout monu  
Dan oll assambleou.

41° COUPLET

Be zo c'hoas cals mehet  
A gar besa guisket  
Gant gallonchou var o brec'h  
Evel generalet.

42° COUPLET

Rac se ta camaradet  
Ne vec'h quet estonet  
Ho vel eur plac'h evel dinn  
Caret gant ar botret.

43° COUPLET

Tarliperien eus peb bro  
E teuas d'ent goulen  
Deus Elliant, Tourn a Coray  
Ha memes Rosporden.

44° COUPLET

Unan all a teuas c'hoas  
Eus a barres Ergue  
Mes re vras oa et vragou  
Vit cozeal gane.

Be neus eun ty, eur jardinn  
Ag ive cals arhant  
Jamais ve guellet ludic  
Lavaret dign e unan.

50° COUPLET

Setu va mamm neuze  
Clevet, ne vant quet contant  
Demet gantan va merc'hic  
Henes deus calz arhant.

51° COUPLET

Guelloc'h e gavant bet paour  
Eguet be penvidic  
Eguet kemer d'a bried  
Eun drandoue ludic.

52° COUPLET

Me lavaro d'eorch va mamm  
Piou rencant da gavet  
Neo quet red penvidic  
Ma ve an den renket.

53° COUPLET

Ar pot fur a chentil  
Az eur pod digourdi  
E meus esperans da gaout  
Aroc m'a zemesi.

